

Kanerez koz

Pluned

gant

BARZ AR GOUET



SANT-BRIEG

Moulerez Sant-Gwilherm, 27, bali Charner

1910

KANEREZ KOZ PLUNED

*Colligite quæ superaverunt
fragmenta, ne pereant.*

Dastumit an tammou manet,
Gant aon ne ve hini kollet.

JEZUZ, en AVIEL SANT YANN (VI, 12).

I

Dirag ar volz kaer-man kizellet en envor
Da Varc'harid Fulup, pen-kanerez Arvor,
E tassono ive ma zelen 'n hec'h enor.

Nemed eur wej hepken ne dizis he c'hlevet ;
Gant pebez levane ha souez d'am spered,
Pebez trid em c'halon, n'oufen ket e laret :

Breiz koz oa dirazoun ! C'houez hec'h ene dinam
A nije war ma zal tommet gant grouez he flam ;
Ken didro ha poellek, ken serz e oa, hon Mam !

Embannet voe, pell zo, 'oa toc'hor Breiz-Izel
Dindan taoliou tud gin a ra d'ei gwall-vrezel ;
Neuze hen gwelis splann : hi na dle ket mervel !

II

'Raog-ze, 'm oa selaouet ha skrivet alies,
Laouen, diwar diveuz eur paour pe baourez kez,
Eun tam marvailh gwejjall, ha peziou barzoniez ;

Pelec'h 'kavjen, avat, ar c'houn start ha gwirion,
Ar skiant-natur eeun, hag evit furchal don,
Evit dastum, diski, kana pep ton ha son,

Enklask pep disrevel, e kement korn ar vro
Dihun hegleviou kent triouac'h leo tro-war-dro,
Ar youl-vat 'oa en God, Doue d'he fardono !

Groeg hec'h ijin uhel, Marc'harid na ouie
Distaga ger gallek na digej kroaz-Doue ;
Ar Ouiziegez, padal, a lar d'ei : « Trugare !

« Trugare, mestrez fur ! me zo dleourez d'it
Muic'h eget da gals tud lennek a zellid :
Te 'ziskas d'in treo mat na gavjed e nep skrid.

« Gant Luzel hag Ar Bras, barzed ar gouzieka,
'Teus lemet tenzoriou diouz islonk 'n Ankouna ;
Pinvidikaet ganit, me az trugareka ! »

III

Bue 'r bed-ma 'zo berr, ha pez a reomp enni
Dister, e skoaz kement hon eus da zeveni :
Goude hon poan, hon skouer a boagn evidomp-ni.

A-youl Doue 'vo bev, pell, skoueriou mat kenan
Eur bevaïg ken leun, peurwestlet da ganan,
Herve ar geriou aour garanet er be-man !

Broïz ar ganerez, kendalc'hit he mennoz :
Karit gwerziou nerzus kanerien gwejjall-goz
A zo kousket divrud en bered o faroz ;

War he lerc'h, kanit c'hoaz, gant karante dener,
Ar zoniou a ziwan er brezoneg seder
Evel ar bleuniou briz bep ploa er prajeier :

Kanaouennou santel, ha doanius, ha lirezin,
A ra d'an holl pidi, 'vel galv ar c'hloc'h skintin,
Hunvreal pe gouela, pe diroll da c'hoerzin !

IV

Kelennou talvoudus a zav deus bueiou
God Fulup, ha Luzel a voulas he soniou,
Studiet gant preder en kement a vroiou.

Tud disket, 'jomit ket chouchet 'vel en toul bac'h
Emesk ho parichou : ne c'hellit ken hen nac'h,
Ar bobl 'zo eul levr beo kentelius meurbet d'ac'h.

Petra ne rofec'h ket 'vit kaout, deuz 'n oad pagan,
Poziou bet dastumet gant eul Luzel roman
Diouz genou e sklaved, 'n o yezou o-unan ?

Hogen ar geiz n'oant grêt, e sell mistri faeüs,
'Met 'vit reuz, dismegans, hag emdagou euzus,
Ken 'paras war ar bed sklerijen veur Jezuz.

V

Breiz, o vont gant he hent, 'lez ar chas da harzal.
Hec'h enebourien gri a zo tri seurd : tud fall ;
Sodien ('zo ar muian) ; dallet eo ar re-all.

C'houi, a sked « Araokât ! » war ho paniel, eur gir
A zo lugernus-flam ha lem, evel an dir ;
Stroll dibab, emroet d'ar mad, d'ar c'haer, d'ar gwir ;

Tud 'n Oad da zont ! o trei ho kein ouz luc'h an env,
N'it ket da gas ober da Vreiziz mont war drenv,
Besteodet, hanter-vut, peuz vouget o mouez krenv,

Kollet yez ar varzed, ar yez c'hlan euz o gouen :
O gwir hag o dlead eo diwall da viken
Lavar o gourdadou, hêrez d'o gourvibien.

Brizeug hen disklerias er galleg c'houek a Vreiz :
« Ar c'hompeza, ar marv ! hag ar Ouiziegez reiz
A sklera hon spered hep didana hon c'hreiz ! »

BARZ AR GOUET.
